

Chanson

Var sujet daou zen yamant en em garie fidel,
hac a zo bet separet gant qerent ar Plac'h.

(439, suite)

Var ton :

A propos e qafen agreabl d'am speret,
Composi ur chanson bremâ pa meus sujet ;
Ma c'hallen caout repos ha cessi va daerou,
Me scrife ur c'hopi pa meus ha plûn ha liou.

Daerou continuel a scuill va daoulagad
A red gant va diou chod evel ar voaz er prad
O consideri bremân pequer bras ar soufrant
An andur ar galon o coll an esperant.

Done oll-buisant, crouer an oll astrou,
Am rent sur ar victim eus va flamedennou.
E creis fons va c'halon ez on passionet
Gant un desir ardant da garout un objet.

(440)

Me gar gant passion ur femelen charmant,
A zo tostiq d'am zi, me he quel en he c'hamb ;
M'alfen plizout dezi qement hac he pliz din,
Me a esafe mont buan d'he zaludi.

M'o salud gant henor, va Rouanez puissant,
Ho craf zo admirabl, ho qenet zo charmant ;
Ho charmo zo souverey var va c'halon bremân,
Emedi 'n ho pouvoar : dispozit dioutân.

M'o ped d'am excusi ma meus an ardiant,
Gant quin humilité m'er ro dec'h en ofrant ;
Mes estranch e c'afac'h e ve un den diste
En defe an henor da vout ho servicher.

Me ne veritân qet ur sort possession,

(441)

Rac ar c'haera tenzor ez eo sur ho calon.
 Credit en assurance m'ar en accordit din,
 Me vo ho servicheres e qeit ha ma verin.

Ho reputacion hac oc'h oll vertuziou
 A ra din desirout possedi ho craçou ;
 Gant ho permission a hirio da vigen
 Me vo ar fidella eus ho servicherien.

Ar quir fidelite a zo a gouseqanç
 Hac un arm redoutabl da zifen ar goustanç ;
 Mar bec'h fidel din-me, evel ma leveret,
 C'houi vezo da vigen sur va muya caret.

Bet vidon amitie, destruijet ar soupçon ;
 Bras ar sincerite eus va affection.
 Gement en ho caran, me ho ped da gredi,
 Me golfe va bue vit conserv hoc'h hini.

(442) Pardonit, va mignon, rac ne veritan get
 Receo demeus ho feurz gement all a respet ;
 Mes evit prouti dec'h eo bras va amitie,
 Gent evit mançout dec'h me golfe va bue.

Plizet ma vin hepret en ho proteccion,
 Ha finissomp bremâ hor c'houveracion ;
 Mar carit agreabl e vez dec'h servicher,
 Me deuyo adare hep dale pel amzer.

Eus a greis va c'halon, mar gra plizadur dec'h,
 Charmet vin d'o quelet, n'en eus fors e pelec'h.
 C'houi a zo un objet, ervez an experianç,
 A zo plizadur vras beza en ho prezanç.

Me ameus ur bonneur ha ne veritan get ;
 Caouet evit Mestrez ur plac'h qer distinget :
 Hi eo ar Rouanes a bossed va c'halon ;
 Eus va sincerite he fournis cocion.

(443) Bars en eur zantimant eus a berseveranç,
 E zân-me da velet va douç, va esperanç,

Vit gallout contempli he jenerozite,
Pé hi ar follières demeus va liberte.

Debonjour, va Mestres, Rouanes va c'halon,
C'houi a representant din pep sort perfeccion;
C'houi a zo un Azil d'am c'horf ha d'am speret;
C'houi eo ar medecin a gonserv va yec'hett.

Me garje, va zerricher, e vijen partajet
A gement a dalanchou evel a leveret;
Mes simpl en ho caran dont d'atribui din,
Gement a veritou, pa ne meus-me hini.

Grêt emeus ar breven gant quir experianç;
Me a zo esclavour dindan ho puissanç;
An inclinacion ameus-me d'o caret,
A alum en c'halon tãn an amourouset.

An drase zo eur merç eus ho civilite,
Ha nonpas eur breven demeus hoc'h amitie;
Ne alfen get credi e ve ho carante
A deufe d'o laqat er sort extremite.

(444)

Va c'halon, va Mestres, a voa en eun armet
Evit en en difen eus charmou ar merc'het;
Mes c'houi gant ho charmou hoc'h eussi attaget:
Ema en ho prizgon gant chadenou staget.

M'am bije ar sapient en devoa Ciceron,
Evit ma c'hallen lenn ebars en ho calon,
Me a hanaveje sur an differançou zo
Etre ha zontimant hac hoc'h oll broposiou.

M'am bije ar pouvoar en devoa Marc-Antoen,
Da zizolo va c'halon evit ober dec'h lenn,
Vor hini eo gravet en lizerennou don,
En ho caran, va Mestres, gant quir affection.

Me o ped, va mestres, bezit ferm ha constant,
Ha ne zelouit get an teodou medisant,
Pere zo adversour da Venus, d'Apolon,

(445)

A dor an amitié chadennoù Cupidon.

Bezit persuadet eus va fidelité ;
 Me zo evel eur roc'h ebars e fermeté :
 Me ne zelaouin get teodoù malicius,
 Noazus en peb amzer, flêmon pernicius.

Ebars en ho presanç, n'oufen get enoui ;
 ... so:et eo an heur : ret eo n'em zepari.
 Eus ho pedi da chom er zantimanchou-ze,
 Gen ambo 'r blijadur d'o quelet adare.

Credit, va zerricher, me a vo dispoet
 Da zonet d'o receo gant honor ha respet ;
 C'houi a zo un objet ervez va fantasi ;
 P'o quelin o tonet, e reot plijadur din.

(446) Me a gred va Mestres zo 'r zoursen à zouster,
 P'otramant eur fleuren eus an neverz amzer,
 Pehini a ve gye ebars e peb sêzon,
 A gar he zerricher gant quir affection.

O vonet d'e quelet, me ameus abordet
 Euy drezen maleurus hac he deus va figet.
 Santimanchou barbar eus a beurs he c'herent,
 A deu d'or zepari balamour m'en em gariomp.

Va Mestrez gant couraj, fermeté ha constanç,
 He deus grêt efforchoù demeus a resistanç,
 O sonjal conservi an amitié sincer,
 Evit recompranci he fidel servicher.

Mes he oll efforchoù ne zerrich get dezi :
 He c'herent a bretant e ranço demerji ;
 Fixet o deus o choas, ervez o bolonté,
 Dre m'o deus eur respet vras evit o c'halité.

(447) An objet precius pini zo protesjet,
 Evit caout ar jouissanç eus va muia caret,
 A-ra e zilijanç evit satisfia ;
 Mes pa barlant outé, hi ne respont netra.

264

He c'herent transportet a laras dei souden :
 Demezi a rangit herve hor gourc'hemen .
 C'houi zo , plac'hic yaouanq , dindan hon dependanq ,
 Ret eo oboissa , daouest d'oc'h oll constanq .

Demezet eo eta Rouanes va c'halon ;
 Ne meus nac esperanq , na consolacion ;
 Erit cresqi va anui he deus he bro quiet ,
 Ha va lezet va - unan da voela gant regret .

P'en em velan privet eus an objet a garan ,
 He a bed ar maro da zont d'am delivra :
 N'on get vit resista ous ar poan a zoufran :
 Pa zeo va douq demezet , ne c'houlon mui beva .

Ar maro ne deu get ; mes eur voez consolant
 A ro din da entent eo ret beza contant .
 Doue a gasti gant e zorn puissant ,
 An du[da] vo fos d'o c'houz , mes nan an inoqant .

(448)

Oteur ar chanson - ma a zo un den yaouanq ,
 En deus eur galon dener , mes eur speret contant ,
 Hac en deveus - hi grêt gant ur quir amite ,
 Er bba mil eis cant pevar , ar c'hoerqec a vis Me .

Un avis gent finissa a roan d'ar voaset ,
 Mar qeront evita na viont get tromplet :
 Pa garesfont merc'het , qemeret daou alc'houe :
 Unan vit ar zorti , un all vit an antre .

Va secret zo quinion , gant calz a dud aprouvet ;
 Qement zo ignorant a dle beza instruet .
 Na meus gentrou laqet e zan da bartia ;
 He zo ganet en ul lann , harvet on Colceva

(Vol. II, p. 439-448.)
 38 str. numérotées.